

**Kemalennoù e kerc'henn ar c'helenner
e sigur plaenaat an dielloù roet d'ar skolidi**

Beaj kentañ [dielloù 1 ha 2]

Gant daou lestr ez a Karter war roudoù pesketaerion moru an Douar-Nevez. Karter, eus Sant-Maloù, o anaveze mat.

D'al lun 6 gouere en em gav Jakez Karter hag e vartoloded gant Amerindianed evit ar wech kentañ. Indianed ar vroad Mikmak, a vaez da Bae Chaleur. En deizioù da heul e teuont a-benn da gaout fiziañs an eil re ouzh ar re all hag e eskemmont traoùigoù, kontilli, danvez lien ouzh krec'hin loened.

D'ar gwener 24 gouere e touar Karter e Gaspe, ma plant ur groaz skrivet « Bevet Roue Frañs » warni. Eno en em gavont gant Amerindianed ar stêr Sant-Laorañs. Eno ez asant Donnacona, o fenn bras, reiñ daou eus e vibien, Taignoagny ha Domagaya, da Garter d'o c'has da Frañs. Prometiñ a ra Karter e teuint en-dro ar bloaz war-lerc'h hag e c'hallint servijout evel troourien.

Eil beaj [dielloù 3 ha 4]

Dipitet eo François I^{añ} gant pezh a zegas Karter eus e veaj en-dro.

Evit e eil beaj ez a Karter gant tri lestr : an Erminig (60 tonellad), an Emerillon (40 tonellad) hag an Ermin Vras (120 tonellad) a gas Karter e-unan. Kas a ra gantañ daou vab Donnacona a oar galleg bremañ. Mont a reont betek Stadakone (Kebek bremañ) ma adkavont Donnacona ha betek Hochelaga (Montreal).

An dro-mañ e tistroont da Frañs gant Donnacona e-unan, e zaou vab ha seizh Amerindian all. Displegañ a ra Karter da François I^{añ} ez eo an Douar-Nevez un enezenn, komz a ra eus ar stêr Sant-Laorañs a c'hallfe bezañ un tremen war-du Sina. Mont da Sina a oa pal kentañ François I^{añ}. Karter avat n'en deus ket klasket mont betek penn ar stêr gant an diouer a amzer. Dedennet-bras eo ar roue. Donnacona, ar penn amerindian, en deus komprenet pezh a felle d'ar Frañsizien ivez (aour, mein prizius, temzoù) : roet en deus un tamm aour da Garter hag evel Karter e lavar e c'hell kas ar stêr Sant-Laorañs d'ur meurvor all ha komz a ra eus ur rouantelezh amerindian pinvidik-mor.

Trede beaj [diell 5]

An dro-mañ e tiviz François I^{añ} aozañ un trede beaj evit staliañ un drevadenn. An dro-mañ e ro ar roue galloud d'an aotrou Roberval, ur mignon dezhañ, da drevadenniñ ha da gristeniekaat. Karter a vo an eilvestr hepken.

Mervel a ra Donnacona e Frañs, Amerindianed all ivez, re all a zimez. Hini ebet ne zistroy da Ganada.

Lakaat a ra Roberval aveañ pemp lestr. Dieubiñ karc'haridi d'ober an drevadennerien nevez, kargañ al listri gant chatal ha plant a bep seurt. Dale a zo gant aozadurioù Roberval. Karter a loc'h heptañ hag emgavout a ra e Stadakone goude tri bloaz disrann. Deuet eo mat gant an Amerindianed goude m'eo marv o fenn bras. Reiñ a reont « aour ha diamantoù » dezhañ. Met an darempred ganto a ya war washaat hag enebiezh a sav etre ar Frañsizien hag an Amerindianed. Divizout a ra distreiñ da Frañs e-unan.

Lakaat a ra Karter kevarouezañ ar c'hailh deuet gantañ : n'eo ken pirit ha kouarz na dalvezont ket kalz a dra.

Chom a ra Roberval hag an drevadennerien gentañ e Kanada. Met en abeg d'an darempred fall gant an Amerindianed, d'ar goañv re yen a lazh kalz a dud, hag emzalc'h an drevadennerien gentañ (a oa o tont eus karc'harioù ar roue) e tilez e drevadenn ar bloaz war-lerc'h, anat a-walc'h e felle d'an dud-se gounit kalz a aour muioc'h eget staliañ ur gevredigezh ha kristenekaat ar c'hevandir nevez.

N'eo ken d'ar 17^{vet} kantved eo e teuy Frañsizien en-dro d'en em staliañ : e 1608 ez a Samuel Champlain da adsevel Kebek, met an drevadenn gentañ ne grog evit gwir ken e 1633.

Mammenoù :

http://histoireenprimaire.free.fr/ressources/textes_temps_modernes_decouvertes.htm

<http://www.frontenac-ameriques.org/histoire-et-memoire/article/jacques-cartier-francois-ier-et-le>